

(28, suite)

## Canaouen nevez.

Var un ton dang-tro.

(29)

Yannic en deus chenchet quis :  
 Eat e reor da vourc'his . . . . quē } 2 vech.  
 P'eus get mezh, p'eus get mezh,  
 Los autronic manquet ;  
 P'eus get mezh, p'eus get mezh  
 Chom c'hoas var ar mezh ?

Na perac eur bragou moan  
 E lec'h unan ledan ? . . . . quē } 2 vech.  
 C'houi po mezh, c'houi po mezh,  
 Pa vo clêvet ho toare ;  
 C'houi po mezh, c'houi po mezh,  
 Va autronic qez.

Reor re bell var un dorchon  
 A ya da bladiquen, . . . . quē } 2 vech.  
 Bragou moan, bragou moan  
 Zo ret da gaout neuze ;  
 Bragou moan, bragou moan  
 Zo ret d'ar potr Yan.

(30)

Yan, braganet er quis-se,  
 En em gar eur potr tre, . . . quē } 2 vech.  
 Treuz e doc, touz e benn,  
 Mouchouer var vouzellou ;  
 Treuz e doc, touz e benn,  
 Hac 'en qerzet plen.

Mes, ma velfec'h e gôf-gar,  
 Ne gaffec'h get e bar, quē } 2 vech.  
 Bragou moan, bragou moan

A viro qementse ;  
Bragou moan, bragou moan ;  
Tred an traou dindan .

Eur Breizhiad en e zillad  
A zisqiez eo potr mad, quē. } 2 vech.  
Bragou bras, gouris ler  
En dro da vignonic ;  
Bragou bras, gouris ler  
Zo traou re bonner .

Eur Breizhiad a oll viscoas  
A zalc'h mad d'e bern-bas, quē ; } 2 vech.  
Goalennic glas pe venn  
Faut d'an demezelic ;  
Goalennic glas pe venn  
Scanvoc'h da zouguen .

(31)

Hon tud cōs, gant quirione, } 2 vech.  
Guechal a lavare, quē :  
Bragou moan, bragou moan  
En eur pegad labour ;  
Bragou moan, bragou moan  
A vo bepret goan .

Hor mamou, pa voant yaouane,  
Merc'hedigou divanc, . . . . quē, } 2 vech.  
Eur zonic a ganent :  
C'houi, merc'hed, disqit-hi ;  
Eur zonic a ganent ;  
Clêvit petra lârent .

M'am bezo bigen eur goas,  
Vo unan bragou bras, . . . . quē ; } 2 vech.  
Bragou, bragou moan,  
Perz zo barz na dal tra ;  
Bragou moan, bragou moan  
Ne dal get ar goan .

Mar peuz bet digant da dad  
Ascorn ha divorzad, . . . . quē, } 2 vech.

(32)

Dalc'h mad d'az bragou bras.  
Mignon, mar am c'hrededez,  
Dalc'h mad d'az bragou bras,  
Ne vezj get voas.

Mes mar dout un douic flabq;  
Mar mâ da reor d'e glasq.... quē } 2 vech.  
Bragou moan, bragou moan  
Zo mad dit da quemer:  
Bragou moan, bragou moan,  
Den ne laco van.

Bragou moan o tont er bed,  
Tri baëron en deus bet, quē; } 2 vech.  
Puch-e-reor, Gannic-Treud,  
Ha Yannic Kergorden;  
Puch-e-reor, Gannic-Treud,  
Tri dibuner neud.

Puch-e-reor zo 'r freilley den,  
Dioç'h costez Rosporden,.... quē } 2 vech.  
Crouquet e vragou striz,  
Betec e ziou gazel;  
Crouquet e vragou striz  
Quis eur c'hos bouc'his.

(33)

Gannic treud, bemnoz timat } 2 vech.  
A yê da gramproessât, quē,  
Hac ar brud a lavar  
Gant qu Mari-Janic;  
Hac ar brud a lavar  
Eo eat e gôf-gar.

Kergorden, e benn touzet } 2 vech.  
Gant e c'halec stropet, quē,  
Zo bet eur bla pe zaou  
O tisqi c'huitellat;  
Zo bet eur bla pe zaou  
Ebars er galeaou.

Bremâ-ta, vit ho profit,  
C'houi quedo, mar qirit, quē } 2 vech.

112

Mod ar mēz gant mod gēr  
 Spont an dud a fēçon ;  
 Mod ar mēz ha mod qer  
 A ra din caout doujer .

C'houi pere a red bemde  
 Varlerc' h quiziou neve , ... guē } 2 vech .  
 O chench preg , o chench mod  
 C'houi rēi en bēn amzer ;  
 O chench preg , o chench mod ,  
 Tud foll dio'ch tud sot .

(34)

M. Henry, prêtre .

(Vol. VII, p. 28-34)  
 str. non numérotées .